

CHANSON

POTRET PLOUILLAU

Var ton : Adieu Pontreo

M'am bije speret da gomprenn, evel a meus fantasi
Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi
Eur c'himiad leun a c'hlac'har, gret dar gonscrivet yaouanq
O deus tennet ar billet ebars er blaves present.

Ebars er bla mil nis cant c'hoec'h, ar bemp a vis guengolo,
E seo digueet adare eus a barres Plouillau
Tud yaouanc evit an arme, tud deus an terrupla ;
Glac'haret eo oll ligne, p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeus quet nemet pevar ;
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar Maledar,
Ha Yannic Prat, eus ar Goajou, ha Pipi an Aveant ;
Pevar den eus ar re vrava, corfou koer ha tud vaillant.

Ervoanic Jacob a lare en daiz-se d'he gamarad :
Ema a so eun devez trist hac a ra din calonad !
Guelet va mam baour o vouela, ha va sad ques desolet !
Va c'halonic ebars em c'hreis so dija casi rannet

Kals a sonchfe de, martese, pennos e vent eur poultron
Em be aoun rac eun ten fusuil pe rac eur voulet canon
Pe otramant aoun rac ar fatig o vale dre an hentchou
Pe gousquet var eu guele gant ebars er c'hordgardou.

Douguen va dillet var va chouq, va fusuil ha va sabren
Bale bemde a guer da guer dre ar fanq hac ar vouillen
Ha goude e fin va beac'h, rencout martese campi
Pe gousquet var an douar ien, pe otramant bivoaki.

Tor o deus an nep a sonch-se ; ma c'haljet lenn em c'halon,
Evit gwelet va bolonte ha va inclination,
Ma ne fotje nemet va goad, me en scuilfe tout joaus
Evit souten eun Impalaer eun tad quer carantesus !

Piou na gombatfe quet gant eun Impalaer christen ;
Eur gaus ker just ag e hini, so facil d'a souten,
Pa zomp memprou da Jesus-Christ, soudardet an Aviel,
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-Santel.

Arça eta, camaradet, quen quittaad eus om c'homtre,
Demp ni da ilis Plouillau ar supplia on Doue
D'hor preservi demeus goal chans pa vesimp en armeou
Ha da gonsoli, bars ar guer, hon tadou hag hon mamou.

Adieu dec'h, Autrou Sant-Millau, patron eus ar barous ma,
Adieu kerent ha mignonnet, cessit breman d'a vouela.
Pedit Doue hag ar Verc'hes, da gavet soign ac'hanomp,
Hac hon Ael mad d'on c'hondua partout elec'h ma zelomp.

Adieu, va mab, va esperans. eme an tad desolet ;
Piou a gonsolo va zud paour, goude ma vi partiet ?
Pa vin accablet gant cosni, me vo clevet o laret :
Ma vije ma mab ques er guer, en dije va soulajet.

Clevit ar vam o quiniadi ive digant he buguel ;
Deus ama c'hoas, ma boquin eur vech quent evit mervel
Aben ma retourni d'ar guer, me vo ed eus ar bed-ma,
Deus aman etre va dioubrec'h evit ar voech divesa.

A guichen at moment fatal ma c'heus tennet ar billet,
Beb nos vel ma fot din cousquet, me a seblant da velet
O tont deus eur combat sanglant var eur chariot bleset
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonnet.

Ar zoudard yaouanc contristet c'hoas quen evit partia,
Evit essai o c'honsoli a lavar en eur vouela :
Tavid va zad ha va mam baour, ha bevit en esperans,
Doue, tad a visericord, a so hras e brovidans.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,
Gras Doue gar ar Verc'hes, e veso fin do clahar
Evit merk eus hon vaillantis, gant lore deus hon tocou
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hi o taelou.

Adieu da baros Plouillau, ha de holl habitantet,
Adieu d'hon oll anaoudegas, ha kerent a mignonnet,
Ha ma na memp quet ar bonheur er bet-man da em velet
Gras deomp ebars er barados assambles da em gavet.